


Buez pe wers Zantez Barba

Gwerc'hez ha Merzerez



BUEZ PE WERS
SANTEZ BARBA

GWERC'HEZ HA MERZEREZ

GRET GANT

J.-P.-M. L., beleg

Diouz ann tan ar c'huruno Santez Barba hon miret
Hag eur maro evuruz evidomp goulennet.

Euz ar vuez, 343, 44^o v.



SANT-BRIEG

TI-MOULEREZ SANT-GWILHERM, 27, BALI CHARNER

—
1914

APPROBATION

Saint-Brieuc, le 17 juillet 1858

MONSEIGNEUR,

J'ai examiné la chronique de *Sainte Barbe*, vierge et martyre, traduite en couplets bretons, avec le cantique qui la suit, en l'honneur de la même sainte, et je n'y trouve rien qui s'oppose à ce que vous en autorisiez l'impression.

Je suis avec respect,
Monseigneur.

De votre Grandeur,
Le très humble et très obéissant serviteur,

AUFFRET,
Vicaire-Général.

NOUS ÉVÊQUE DE SAINT-BRIEUC ET TRÉGUIER.

Sur le rapport ci-dessus de Monsieur l'abbé Auffret, notre vicaire général, avons permis et permettons d'imprimer la chronique de *Sainte Barbe* et le cantique qui la suit.

† **J.-J.ⁿ. PIERRE,**
Évêque de Saint-Brieuc et Tréguier.

Par mandement :

P. LIMON,
Chanoine, Secrétaire.

BUEZ PE WERS ZANTEZ BARBA

Gwerc'hez ha Merzerez

SKLERIDIGEZ

Ganet er ger a Nikomedia, tremen daou c'hant
vla goude donedigez hon Zalver, Santez Barba
a c'houzanvaz poanio heb niver evit ar fe, hag
a oe d'ar fin dibennet evit Jezuz-Krist.

Ann Iliz a ra ne goel ar bevarved a viz kerdu.
E Keriti, dre bermission ann otro'n Eskop a
Zant-Briek ha Treger, e rer bep bla, enn eur
chapel zavet enn hec'h enor, daou bardon meur-
bet hentet gand kalz a ineo mad, pere a beb
lec'h a zired d'enorin relego ar Zantez, ha d'ea
em lakaat dindan he difenn. Ar pardon kentan
a rer de goel ann Asansion, hag ann eil ar be-
varved a viz kerdu.

E Rosko, ne weler ket, gant nebeutoc'h a
herr, eunn niver braz a ineo fidel euz ar Fi-
nister, o tont beb bla da chapel ar verzerez,
evit goulenn dre-z-hi mennado digant Doue.

He fedin a rer, dreist peb tra, evit bean di-
wallet diouz ann tan hag ar c'huruno, gwelet
a glenved ann darsien ha kaout ar sakramancho
divean.

Er bla 1448, e me ann otro Teodorik, beleg, e
c'hoarveaz er ger a Gorg, enn Holland, eunn ek-
zempl euz a vadelez Zantez Barba e kenver ha

zervicherien. — Eunn den, hanvet Henri, meurbet devot d'ar Zantez, en em gavaz da vean serret enn he di, e pehini e krogaz ann tan. Dare da vean deuet ive, e c'houlennaz, dre intersesion Zantez Barba ar c'hras da gaout he zakramanchou divean kent mervel. Raktal ar Zantez en em ziskouezaz d'ezhan, ha, gand he mantel, hen diwallaz ouz ar flammo hag hen tennaz euz ann tan, 'n eur taret d'ezhan : « Doue, abalamour « d'ho karantez em c'henver, a deurve hastenn « ho puez evit rein d'hac'h amzer da gaout ho « sakramancho. » Ar pezh a c'hoarvezaz, evit gwir, rag ann den-man a vevaz beteg ann de oarlec'h, hag en doe he zakramancho en desped ma oa muioc'h hanval ouz eunn den rostet, evit ouz eunn den e buez (tennet a Ribadeneira).

GWERS ZANTEZ BARBA

Oar eunn ton anaveet

Krouer enn env, ann douar, teurvezet ma zouten.
Ma renet gant ho kraso, roet din sklerijen,
Evit galloud disklerian d'am broiz ar vuez
Evez a zantez Barba, ho kwir zervicherez.

Pa rene, er zav-heol, ann tirand Maksimen,
Den digar ha didruez, muntrer ar gristenien,
E c'hanaz da Zioskor, enn Nikomedia,
Eur bugel leun a c'hened, hag he hanvaz Barba,

Euz a gerent pinvidik, ha brudet braz er vro,
Dioskor a oe ganet e skeud ann doueo;
He spered faeuz ha kri, maget er fals-kreden,
Hen greaz gwall gasonuz eneb ar gristenien.

A-boan e deuz bet Barba redet penn he buez.
M'en deuz he zad dinatur, digar ha didruez,
He laket enn eunn dourel 'vit kuza he gened
Ouz ar re na c'houlje ket rei d'ezhi da bried (1).

Prezant euz ho madelez, ar gened, ma Doue,
A-liez braz, er bed-man, zo noazus d'ann ine;
Mes 'vit ho servicherez oe eur mad gwirion
Hag he ren prim da Zoue, a zalc'h pur he c'halon.

Kouskoude graso Doue, kaer evel ar stered,
Dija ho deuz lugernet d'ar bugel binniget,
Ha prim tommet gand ann tan eus ar gwir ga-
[rante,

Barba a ro da Zoue he c'haloun, hec'h ine.

Mes etouez trouz ar bed-man, Doue n'en em
[gav ket,

Rak he voez zo ker sioul ma klask ar zioulded
'Vit komz ouz ann ineo, tomman ar c'halon,
He vadelez ho digas bepred el lec'h distro.

(1) Abars neuze e oa bet badeet, hep goud d'he zad.

O madelez dreist muzur ! Doue a garantez !
Evelse hoc'h euz renet ho kwir zervicherez;
Lezet hoc'h euz bel teurel Barba enn eur prizon,
Hag eno hoc'h euz tommet ha nerzet he c'halon.

O dihentedigez ker, c'houi a zo d'am ine (1)
Eur warez ouz ar pec'hed, eur rener da Zoue:
C'houi eo a ro d'am ine, er bed ken trubulluz
Da gomz bepred ouz Doue, ha da garet Jezuz.

Graso Doue hep niver er prizon a zisken,
Barba e deuz tanveet douzder ar gwir lezen,
Hag a garantez Doue he c'halon entanet
E deuz gwestlet da zoue he gwerc'hed 'vit bepred.

Kouskoude eunn dijentil, brudet kaer dre ar vro,
Dre zoare vad he gerent ha dre he oll vado.
Goneet dre he gened, he goulenn da bried,
Ha Dioskor, leun a joa, en deuz he c'hir roet.

Mes ar bugel binniget a respontaz d'he zad :
« Kement-se na ve ket mad na memes deread,
« Rag eur prins em euz choazet, leun a c'hras,
[a c'hened,
« Ha d'ezhan hed ma buez ma c'halon vo bepred. »

P'en deuz bet kavet he verc'h ken stard enn
[he c'homzo,
Ha kollet gant-han he boan hag he oll bedenno,
Ez eo et enn eur goler ken braz ha ken heurzuz.
Ma ve diez disrevel (2) he rustoni spontuz.

(1) Dihentedige — solitude. (2) disrevel — eksplikan.

He zad p'en deuz he gwelet stard bepred 'n he
[c'homzo

Evit esa he gonid a guita prim he vro;
Mes kent 'vit mont e pell bro, kent 'vit he dilezel,
Eul lec'h evit 'nem walc'hi 'vit-hi a urz sevel (1).

Barba p'e deuz 'n em welet gand he zad dilezet,
Etre divrec'h he c'hrouer raktal zo 'n em dolet;
Ha ker buan he c'hrouer, 'vel ar gweilan mignon,
En deuz sec'hed he daero, ha nerzet he c'halon.

Ken kaer evel ann heol, pa zav diouz ar beure,
Gras Doue d'ezhi lugern hag a domm hec'h ine;
'N em zantout a ra neuze nebeutoc'h hec'h-unan,
Pa vev gand Doue hepken, pa ne gar nemet-han.

Da nebeud euz he zourel e tiskan da welet
Ann-ti evit 'n em walc'hi, 'vit-hi hanter zavet;
Elec'h ober daou brenestr, hervez urzo he zad.
Tri enn enor d'ann Dreinded ec'h urzaz lakaat.

P'en deuz peb ober dister, gret 'vid-hoc'h, ma
[Doue,

Eunn dalvoudegez huel evit ho pugale,
A bed gras, o ma Doue, n'hoc'h euz ket bet peet
Ann ober-ze ken meuluz euz ho merc'h vinniget?

Mes pa wel ann ineo keit euz hent ar furnez
He c'halon a zo karget a bep tristidigez;
Hag a-bred he daoulagad a zeu da skull daero
Pere a gwerz er feunteun evel perlezenno.

(1) Eul lerc'h evit 'n em walc'hi, — eur bain.

Kent monet eveuz ann ti, Barba e deuz lezet
Eur merk euz he c'harantez evit Salver ar bed :
He biz oar eur piller marbr en deuz merket
[eur groaz,
Ha den n'en deuz bet gallet he diverka biskoaz.

Ar vrud euz ar burzud-man a-bred a zo redet ;
A bep lec'h hag a bep renk e reder d'he gwelet ;
Ha kerkoulz ar bobl kristen 'vel tud ar fals-
[kreden

Ho deuz meulet enn eur voez Doue ar gristenien.

Ho karantez, ma Doue, 'vit ho servicherez,
E deuz c'hoaz lezet digor tenzor ho madelez ;
Rag ann dud klanv ha langis d'ann ti-man di-
[redet

Oll hoc'h euz karget a joa, oll ho deuz ar iec'hed.

Kouskoude hec'h huanad, he skull kalz a zaero
Pa wel dre oll enn ti-man skeudenno doueo ;
Enn eur grachad oar-n-ezhe ar zantez a lavar :
« Ra vezo hanval ouz-hoc'h neb ho meul hag
[ha kar. »

Dioskor, euz he veach, a vec'h arru er vro,
A-bred en deuz bet gwelet dilezet he urzo :
Tri brenestr en deuz gwelet oar ann ti lakaet,
Hag eur groaz oar ar piller buan en deuz gwelet.

Dioskor, leun a zouez eveuz a gement-man
Ann abek digand he verc'h a c'houlou ken buan.

Ha raktal e deuz laret gand kalz a hardizder
Ann obero burzuduz euz hon mestr, hon c'hrouer.

« Doue en deuz ma c'hlasket, ekreiz ma faouran-
[tez,

« Hag en deuz bet ma galvet gand kalz a ga-
[rantez,

« Ma renet gand madelez, enn hent ar sklerijen,
« Ma frealzet (1), ma maget gand douzder he
[lezen.

« He lezen, leun a zouzder, a zo 'vit ann ine
« Eur vagadurez nerzus, eur vammen a vue ;

« Ha, seul-vuioe'h m'he heulier, seul-vui e ver
[euruz,

« Rag gret evit-hi, hep-z-hi e ver bepred nec'huz.

« Oar ann ti nevez savet tri brenestr a zo gret
« Enn evor hag enn enor d'ann Dreinded vinniget

« An Tad, ar Map, ar Spered, tri ferson 'n eunn
[Doue,

« Ingal ho zri entre-z-he a beb eternite.

« Tri ferson enn eunn Doue na hellomp ket intent,
« Rag eur mister braz ez eo, re vraz 'vit hon
[skient ;

« Mes, p'ez eo d'imp diskleriet gand Doue he-
[unan,

« Kredomp-han ferm, ma gredomp da gomz tud
[ar bed-man.

(1) Frealzet — konsolet.

« Da bep kammed e kevomp, enn henchou ar vue,
« Treo ha n'hellomp ket intent na gouzout ha
[doare,
« Ha bepred ho c'hemeromp evit treo gwirion :
« Kredomp 'ta bepred ive Doue enn tri ferson.
« Bepred tri, bepred unan, a bep peurbadelez,
« Er memes natur divin. er memes douelez (1) :
« An Doue-man galloudek, dre nerz eur gomz
[hepken,
« En deuz krouet hag ann env, hag ar bed, hag
[ann den.
« Leun a nerz hag a c'hened, a c'hlandet, a fur-
[nez (2).
« Goloet gand ar graso, karget a vadelez,
« Ann den a oa gand Doue, kroñet oar ann
[douar,
« 'Vit hen c'haret, hen meuli, ha mont goude
[d'he c'hloar.
« Mes prim, dizanaoudek a gement a c'hraso,
« Ann den eveuz he Grouer a zispriz ann urzo :
« Frouezen ann droug hag ar mad en deuz bet
[tanveet.
« Hag ar pec'het, ar maro, a zo et dre ar bed.
« Ann den er pec'heñ muntret a zlie chom ato,
« He zireiz en doa serret oll ãoriou ann env.

(1) Douelez — Divinite.

(2) C'hlandet — pureté.

- Paneved ez eo, er bed, eil ferson ann Dreinded
« Diskennet 'vit hon tenna a laso ar pec'hed.
« Pa oa redet ann dale, merket gant hon c'hrouer,
« Da rei ar peuc'h d'ann douar, da brena ar pec'-
[her,
« Ann eil ferson enn hon touez a zisken euz he
[c'hloar,
« Hag ann env estlammet a nij oll d'ann douar.
« E korf didach eur Werc'hez, hervez ar bro-
fedeñ.
« Dre vertu ar Spered-glan ez e 'n em inkarnet :
« Ha goude ma oa ganet oa klevet ann elez
« O kanan gant joa, enn er, gloar d'he c'hinivelez.
« Redet en deuz he vuez, enn eur hadan er bed
« Obero a vadelez, burzud bras meurbed ;
« D'ar re glanv e ro iec'hed, d'ar re varo buez,
« Ha da bep ine poaniet, ar peuc'h, al levenez (1).
« Kouskoude ann drouk-spered, evel m'en deuz
[gwelet,
« He ren milliget er bed, gand hon Zalver gwallet,
« A ijin d'ar judevien hen lakat d'ar maro :
« Jezuz, 'n eur vervel a bae evit hon pec'hejo.
« O burzud a vadelez, Doue oll garante,
« Evelse hoc'h euz peet evit ho pugale,
« Evelse hoc'h euz torret ereo ar pec'hed,
« Ha digoret evid-omp dor ar gwir joausded !

(1) Levenez — joa.

«Dac'h evit-ze, ma Doue, e vo 'pad ma bue.
«Ha ma c'horf ha ma c'halon, ma spered, ma ine;
«Dac'h a hed ar vuez-man e roann ma
[gwerc'ded
«Ha c'houi hepken, er bed-man, em bezo 'vit
[pried.

«Ma zad, lezet ho kreden, selaouet mœz Doue
«He vadelez ho renko etouez he vugale;
«Evel ar poultr enn avel tolet ho toueo,
«Hag eunn de, gand hon c'hrouer, e renfet enn
[envo.

Eul leon, e braz koter, n'en deuz biskoaz iudet
'Vel ma reaz Dioskor p'en deuz he verc'h klevet:
Kounnaret eo he galon, flemmet eo he zello,
Hanval ez eo ouz satan e kreiz ann ifernio.

Neuze tad kri ar Zantez en deuz he milliget
Gand ar mallozo brasan a houfet da glevet;
Loskel a ra oar ne verc'h ann oll gomzo euzuz
A laka enn eur galon eunn direizded spontuz.

He garantez dirollet evit ann doueo,
Ann doan rag ann impaler ha da goll e vado
A ra kement d'he grizder enn em zichadenna,
Ma kemer prim he gleze evit treuzi Barba.

Mes seul-vuioc'h Dioskor a voug mouez ann na-
[tur,

Seul-vui Doue a ziskoue karante dreist-muzur;
Rak diwallet gant Doue ar Zantez vinniget
E deuz redet a zirag ar muntrer milliget.

'Vel ma reaz ar mor ru eunn hent da Israël,
Doue en deuz 'vit Barba digoret ar rec'hel,
Groet eunn hent ez ha diboan d'he vugel ken
[karet.
Mes bepred, 'vel Faraon, Dioskor zo dallet.

Dirag eunn ober ken kaer a vadelez Doue,
Dioskor a 'vag bepred ar venjans 'n he ine;
Evel eul loen kounnaret e pign oar ar rec'hel,
Enn eur iosquel mil malloz oar he vugel zantel.

Ar rec'hel, ar meneo gant heuz ho deuz laret
Ar c'hri, al leodoued euz ann denn kaledet
Hag al lec'nio choumet mud adal penn ann amzer.
Spountet, ho deuz distolet mallozo ar pec'her.

A gorf, a galon renet, gant prins ann ifernio,
Dioskor, 'vel al luc'hed, a red ar meneo,
Bete m'en deuz bet klevet, gant daou veser deved,
Pelec'h e oa 'n em guzet ar Zantez vinniget.

Dies braz e ve laret ar bonheur ifernus
A b'hini en deuz dridet kalon ar malherus;
Hag evel eunn tigr naonek a red d'al lazerez (1)
En deuz redet ar muntrer etrezek ar Zantez.

O Doue a garantez. o Jezuz dous ha mad,
Pehini, 'vit hon prena, oc'h euz skullet ho kwad.
Difennet gant madelez ho pugel kalonuz,
Ha diskarget oar Barba pep sort graso nerzuz.

(1) Lazerez — karnach.

Dioskor, iad ken divad, gwaz evit al loened,
 A ziskarg oar ar Zantez he venians kouñaret;
 Gand he dreid hag he zaouarn e sko oar he vugel.
 Ha krog enn he bleo he stlej dre ar spern, ar
 [rec'hel.

Dindan ann tolio ponner a gouez oar ar Zantez
 En deuz krenet ann douar, ha ha sonet ar menez.
 Ha fement a red he goad euz he c'horf dispennet
 M'en deuz ruet al lec'hio, dre bere eo stlejet.

Ann drez, ar spern, ar rec'hel, al vein euz ann
 [hencho

Enep ann den dirollet a zav oll ho moezio,
 Mez ho c'hrouer d'he venjans ann heur en deuz
 [merket;

Ar muntrer en deuz Barba enn eunn ti prizoniet.

'Vit diskoue he garantez kenver ann doueo,
 Ha teurel car he vugel nez he oll venjanso,
 E ra he stlejan dirag ar barner Marsien,
 Hag he zomall da vevan e fe ar gristenien.

Trec'het gant ann direizded, en deuz bet gou-
 [lennet

Ma vije he verc'h Barba gand rustoni barnet,
 Ober ra zo-ken touet ar barner didruez,
 D'he brevin, dre ar poanio, bete fin he buez.

Neuze 'n eur prizon tenval, Barba a zo tolet,
 Ha d'eunn nebeud da c'houde digaset d'ar prefet
 Pehini, evel eunn aer, dre gomzo touelluz.
 A glask dizrein ar Zantez diouz lezen Jesus.

Mes, o kaout he c'haion startoc'h evit rec'hier.
 En deuz he zouzder tromplus troet prim e kris-
 [der;

Urz a ro d'he diwiska, d'he skei gant skourjeo;
 Ha goude, gand eur zae (1) reun, dispenn he
 [goulio.

Barba meurbed gouliet, d'ar prizon zo stlejet
 Ha miret gant ar barner 'vit bean mui poaniet.
 Mes Jezuz, enn he frizon, da hanter-noz goude,
 En em ziskoe d'ar Zantez hag a nerz hec'h ine.

« Heullet bepred, 'me Jezuz, ma lezen frealzuz (2).
 « Ha genin vefet eunn de 'vit bepred evuruz;
 « Venjans hoc'h enebourien n'hellô ket ho trec'-
 [hin,

« Bepred vezinn n'ho kichen evit ho frealzin. »

Ar c'homzo-ze a Jezuz ho deuz he c'honfortet,
 Lakeet enn he c'halon ar peuc'q ar joasded,
 Gwelaet he goulio, pellaet he drougo,
 Ha roet d'ezhi kalon da c'houzanvi poanio.

Ann de oar-lerc'h a darre, Barba, leun a iec'hed.
 A zo, 'vit bean barnet, da Varsien stlejet,
 Pehini, leun a zouez, ouz he gwelet pare.
 A ro d'ar fals-coueo burzud ar gwir Doue.

« Roet, e me ann tirand, gloar ha melodio
 « D'ar galloud trugarezuz evenz ann doueo

(1) Zae — gouris.

(2) Frealzuz — consolant.

«Pere ho deuz ho nerzet, frealzet iac'heet (1)
«Lezet gen-hec'h ar vuez 'vit galloud ho c'ha-
[ret.]»

He c'halon meurbed tommet a dan ar garantez
Barba e deuz respontet gant beoder ha furnez :
«Jezuz-Krist, gand madelez, a deurve ma c'ha-
[ret,

«Ha ma c'horf ha ma c'halon vo d'ezhan 'vit
[bepred.]»

Ar c'homzo-ze a Varba, ken fur ha ken meuluz.
Ho deuz gred d'ar prezidant mont 'n eur goler
euzuz:

Da zaou vourreo didruez raktal en deuz urzet
Kemer kribino houarn; Barba zo dispennet.

Dija e kri ann houarn e fons ar goullo,
Dija ho deuz da Varba roget ar c'hostezio;
He goad hag ge goullo gant ann tan zo rostet.
Ha gand ann tolio morzol he fenn zo digoret.

Evel er mor kounnaret e chom reut ar rec'hel.
E chom e kreiz ar poanio eunn ine ken santel,
Hag he c'halon, hec'h ine stard ouz he c'hre-
[denno

A ra d'he feden sevel ha nijat d'ann envo.

«D'hac'h, ma Jezuz, e me-z-hi, ma c'halon zo
[roet.

«Ho servichin, ho karet hepken em euz klasket;

(1) Frealzet — konsolet.

«Ma nerzet 'ta, ma Doue, dreiz-hoc'h hellan
[pep tra,
«Mes hep sikour ho kraso biken n'hellinn netra.

He grizder eaz pelloc'h, ar barnier didruez,
Gand otenno ra trouc'han he divromn d'ar Zantez;
Mes ar Zantez kalonuz, er boan-ze ken heuzuz,
A zo leun ha joausded o c'houzanv 'vit Jezuz (1)

Evit galloud gouzanvi gand nerz ha joausded
E lavare alies komz ar Roue profed :

«Na zistroet ket ho sell diwar-n-on, ma Doue,
«Ha na belleet morse ho kras diouz-in-me.,

Hep dale en deuz urzet ar presidant divez,
'Vit spounta ar gwerc'hezed ha dizrein ar Zantez.
Lemel d'ezhi he dillad, he stleja er ruio,
Ha bourrevien oar he lerc'h 'vit he skei gand
[foeto.

Epad ma oa bourreviet, enn eur stum ken heuzuz.

Ar Zantez, leun a fians e madelez Jezuz,
A zav, oar-zu ann envo, he zello gand true,
Ha 'n eur skull daero e c'houl sikour digant
[Doue.

«C'houi pehini oar ann env a had ar goabrenno,
«A zebeli pa garet ar bed enn amc'houlou (2),

(1) O c'houzanv. — Oc'h andurin.

(2) Amc'houlou. — enn devalijen.

«Teurveet, o ma Doue, goloï ho pugel,
«'Vit na vo ket drouk-pedet oar hoc'h hano
[santel

Ann env en deuz he feden selaouet gant truez,
Ha Doue en deuz raktal frealzet ar Werc'hez,
Eur vantel a sklerijen e deuz he goloet,
Hag he c'huzet a zirag sello ar baganed.

He c'horf, meurbed goloet a bep sort goulio,
Ar Zantez a zo stlejet adarre d'ar bourreo
Pehini, ouz he gwelet strad bepred enn e fa,
A c'hourc'hemennaz troc'han he fenn gant eur
[c'hleze.

O dallidigez diboel euz tud ar fals-kreden,
Ho venjans a ra nastan eurvad ar gristenien,
O teurel dre ar maro ho c'horfo d'ann douar,
Da ine ar verzerien e ret nijal d'ar c'hloar.

Kouskoude, evel eunn tigr ar muian kounnaret,
Dioskor en deuz dre oll he verc'h Barba heulliet,
Hag he galon didruez a zo karget a joa,
P'en deuz klevet d'ar maro barn he vugel Barba.

Ken dinatur eo zoken, ma c'houlenn gand aket
Digand ar barner digar eur mennad milliget:
«Roet d'in-me, e me-z-han, p'ez ounn-me d'ezhi
[tad,

«Ann eurvad hag ann anor da beurskuilla he
[goad.

Neuze er mez euz a ger Barba a zo renet,

Ha gand herr oar ar menez stlejet gand sou-
[darded.
Arru oar lein ar menez Barba goue d'ann daou-
[lin,

Ha 'n eur zelled ann envo e ped he mestr divin.
«Da veet bepred meulet, ma Jezuz, ma Zalver,
«Da vean kement karet ho pugel ken dister!
«Mes kent mervel evid-hoc'h roet d'in eur me-
[noz:
«Mat-z-inu gand nep ma fedo gen-hec'h d'ho
[paradoz!

Kerkent, eveuz ann envo, eur voez melodiuz
E deuz lavaret d'ezhi: Ma merc'h karantezuz,
«Ho menoz d'ac'h zo roet, ho peden zo klevet,
«Hastet pignal d'ann envo 'vit bezan kurunet.

«Selaouet c'hoaz, ma Doue, moez ho servicherez:
«Tolet oar ma bourrevien euz zell a vadelez,
«D'am zad kez ha d'ezhe oll roet prim ho kraso,
«Ho diwiziegez a zo kiriek d'ho fec'hejo.

Neuze, kaer evel eunn el, karget a levne,
Barba e deuz astennet he gouzouk d'ar c'heze.
Ha prim he zad dinatur eunn tol en deuz roet,
Hag ann tad muntrer en deuz he vugel dibennet.

Mes a-enep ar muntrer ann env zo koleret;
Pa ziskenn euz ar menez e lugern al luc'hed,
Ann douar zo goloet gand ann devalijen,
Hag eunn tarz kurun hen sko hag hen tol enn
[ifern.

Marsien, meurbed spontet gant trouz ar c'huruno,
A red evit 'n em guzan eun oll lec'hio distro,
Mes venjans Doue enn deuz e pep lec'h hen heu-
liet,

Hag e-berr eunn tarz kurun 'n euz ive hen lazet.

Merzerez madelezez, eur a c'hloar ann envo
Hon sellet gant karantez klevet hon pedenna;
Diouz ann tan, ar c'huruno hon diwallet bepred,
Hag eur maro evuruz evid-omp goulennet.

Evelse bezet gret.



Kantik enn enor da Zantez Barba

GWERC'HEZ HA MERZEREZ

Oar don : *Euz a Vari gand Melodi.*

DISKAN

Diouz ar reusio (1),
Ar c'huruno,
Santez Barba, hon miret,
Ha gand truez
Ha karantez
Oar ar maro hon nerzet.

Enn eunn dourel,
Ine santel,
Tolet 'vit kouach ho kened,
Hoc'h euz douzder
Moez ho krouer
Enn ho kalon selaouet.

'Vel eur rozen,
Enn eunn draouien,
Ar bed en deuz ho klasket;
Mes hoc'h ine
Oa da Zoue,
D'ezhan hec'h euz-hi roet.

(1) Reuzio, — malheurio.

Ho karante
Evit Doue
Abred e deuz lugernet;
Hag ho peden
Dar fals-kreden
E deuz he lugern lemet.

Ar misterio,
Ar burzudo
Euz a lezen ho krouer
Hoc'h euz meulet
Ha splaneet (1)
Ha diskoueeet ann douzder.

Leun a grizder (2),
Ho tad muntrer
En deus klasket o lazan,
Mes ar rec'hel,
Gwerc'hez zantel,
Rannet a zeu d'ho kuzin.

Ar roc'hello,
Ar meneo
Ho poanio ho deuz gwelet,
Ha da Zoue,
Gant karante,
'Neur voez ho leront bepred.

(1) Splaneet. — ekspliquet.

(2) Grizder. — Kruelled.

Servicherez
Ar gwir Doue,
D'ar maro c'houi zo barnet,
Hag er poanio
Hag er maro
E karet Doue bepred.

Eun tol kleze
Ra d'hoc'h ine
Nijal a reusio ar bed,
Hag er gwir joa,
Santez Barba,
C'houi zo breman kurunet.

Hon hirvoudo,
Hon pedenno
Santez Barba selaouet;
Gant madelez
Ha trugarez
Da c'hloar ann env on renet.
Evelse bezet gret.

